



kazetenn ar stourmoù e breizh

EVEN 1983 Niv. 21

10 lur

# bremañ

## 3 bloaz



FOROM E PONDI: UN EMGLEV NEVEZ ?

**L**ennet 'm eus pennañ Herve ar Beg diwar-benn plas ar brezhoneg ba' R.B.T.

E-keñver ar skizmañ eo gwashoc'h c'hoazh an traoù.

Nac'het 'm eus paeañ an tailhoù war 'n tele evit ar bloaz-mañ. Hag evit ar bloaz mañ e rin memestra en ur skizmañ dezho, eveljust, ul lizher o tisplegañ an abegoù.

Sur a-walc'h ez eus kalz tud oc'h ober evelдон. Daoust ha ne vefe ket gouest "BREMAN" da gomer plas R.T.B. da skouer ?

Spi 'm eus e vo "BREMAN" e penn ur stoum adrevezet evit ur chadenn vrezhonek.

Goulennit ta digant ho lennerien lavarout o soñjoù diwar ar stoum-se.

A. Tirili  
Pont 'n Abad

**P**lijus eo ar gelaouenn, kendalc'hit eta. Manteze ur tammig re a dabut e lizhiri 'zo. D'am soñj, pep den a youl vat a dlefe kavout e blas e-barzh an Emsav.

Manteze e vefe posupl embann e-barzh "Berr ha berr" eo ganet SKOL ERJSPOE e Laval, ur skol vrezhonek evel just.

A wir galon.

L. Poisson  
153) Argentré

**N**'on ket souezhet o welout n'eus ket arc'hant ken evit Skol An Emsav. Re efede eo he labour d'am soñj (da skouer stoum ar panelloù-hent).

"Ret eo deomp gouzout ar pezh a fell deomp ober", am eus lennet en niverenn 18. Kalz plijadur am eus bet o lenn ar frazenn-mañ... Setu va skodenn (ur tammig diwezhat memestra).

Souezhet on gant ur dra all : ur benn tabutoù zo diwar-benn R.B.O., ur tammig re zoken, pe ur tammig re start ? Gant piv emañ ar wirionez ? Re bell emañ Palaiseau eus Kemper ?

Gant va gouic'hemennoù gwellañ da skipailh Bremañ.

M. Bertin  
(91) Palaiseau

**D**egemer a ran BREMAN bepred gant ar memes plijadur. Un gelaouenn vev eo evel na vez ket kavet kalz embannet e galleg, ha domaj 'vefe chom a-sav dre ziouer a arc'hant. Ne zalean ket da adkomanantiañ ha da lakaat ma skodenn-skoazell ouzhpenn. N'eo ket kalz a dra, ha koulskoude trawalc'h a vefe evit adsevel an tri fost goprad kollet abaoe tennerien karta-sevenadurel, ma vefe nemet 3.000 den o reiñ talvoudegezh 4 flas sinema bep bloaz.

Kalon vat d'ar skipailh.

R. Allain  
194) Fresnes

# PETRA NEVEZ E BREIZH ?

## deskadurezh

**E**n ur c'helc'h-lizher, d'an 2 a viz Mae, e roe ar Rector da c'houzout e klaske lennerien evit an 21 fost brezhonek a vo, ar bloavezh-skol a zeu, en eil derez (CES ha lise) en Akademiezh Roazhon (netra en Naoned).

Al lizher-se a zlee bezañ roet da anaout d'an holl gelennerien evel ma c'houlennere ar Rector, n'eo ket gwelet evel da gustum, gant kalz a-nezho.

Ar postoù 'zo kinniget da gelennerien war bost ("titulaires"), ha da vistris-skoazell (M.A.) o deus "gwiriou a-walc'h" (d.l.e. o deus labourer ur pennad hir a-walc'h en Deskadurezh). Hervez ar skrid eta ne vo ket kinniget d'an eveshaerien ("pionned") a zo bremañ o kelenn brezhonek, ha p'o dije diplomoù ne vijent ket gant ar re all.

Goulennet e vez digant an dud kaout un diplom skol veur, pe tremen un arnodenn.

Ar postoù-se zo savet da viken, nemet e c'hallfent bezañ tennet kuit ma ne vefe ket a-walc'h a skolidi. Ar gelennerien a vez anvet evit ur bloavezh-skol, ha bep bloaz e rankint larout hag asantiñ a reont kenderc'hel gant kelenn ar brezhoneg e-lec'h o danvez kentañ.

Mark Kerrain.

## breizh

# Hervez "Messages du Secours Catholique" (niv.349-1983) e kresk an dienez e Breizh "buanoc'h eget ar mon-c'hwez" (inflation). E Roazhon eo 220.000 lur zo bet roet gant ar "Secours Catholique".

## paotred ar presidant

**E**renerien dañjerus zo en dro da Fañch Mitterrand. Ne fell dezho rentañ kont da zen eus o labour, nag evel just sentiñ. Archerien ar GIGN eo an dud-se. Ha gwiriou an dud n'int ket chalet gante. Dañjerus int evit hon frankiz... hag evit hini Iwerzhoniz ivez.

Michel Plunckett, Mary Reid, ha Stephen King, bet harzet gante e miz Eost 1982, hag a zo o paouez bezañ lezet da vont goude nav miz e toull bac'h ar Sante o deus desket an dra... diwar o c'houst.

Lakaet oant bet da vuntreierien euzhus gant gwarezerien ar Presidant, ken e oa bet embannet gant an Elize e oa bet tapet tud dañjerus gant gouroned ar GIGN... Hag hiziv eo sklaer eo an archederien-se o doa renket un tammig ar prouennou a oa ezhomm d'o c'has d'an toull evit goumit brud ha fiziañs ar Penn-Bras.

Dizoloet an afer abalamour d'un archer. Eveljust eo bet kastizet... evit bezañ laret ar wirionez. E renerien avat, n'int ket c'hoazh. M'en deus diskleriet M.Plunckett da A.2. ne grede ket ken e oa Bro-C'hall bro ar Frankiz ha Gwiriou Mab-Den. Ar mojennoù kozh-se ganet er bloavezh 1799, bloavezh ar C'hallaoued, pa oa ar Republik Gall nevez da sikour Iwerzhoniz Unanet Wolfe Tone a-enep ar Saozon, a oa poent da Iwerzhoniz a-vremañ kregiñ d'o ankouaat.

## kuzul-rannvro

# Ar PCF a c'houlenn atav ur greizenn nukleel e Breizh. Goude ma vije bet prouet ne oa ket ezhomm anezhi, pa 'z eus re a dre-dan e Frañs hag e Breizh ar 5 departamant. Goude ma vije bet serret Breniliz ar bloaz mañ re gozh m'eo erru, pa oa da vont c'hoazh en-dro un nebeud bloavezhioù.

## deskadurezh

**E**mañ kendalc'h sindikadoù SGEN-CFDT Breizh o paouez sevel a-du gant lakaat ar brezhoneg evel L.V.1 adalek ar 6vet klas, ha kelenn brezhoneg e-lec'h saozneg d'ar re a c'houlenn en LEPoù. Goulenn a ra ar SGEN-CFDT e vefe krouet 1 post kelenn brezhoneg e pep CES ha pep LEP hag unan hanter e pep Lise. A-du eo savet gant un DEUG hag ur C'HAPES brezhoneg ha diorren ar c'helenn divyezhek.

Goulenn a ra ivez e ve savet ur skol divyezhek eil derez e Breizh Izel. Ar c'hinnigoù-se a zo bet votet, a oa graet gant Komision ar Yezh, kaset en-dro gant Yves Jardin (20, straed Ch.de Foucault-29100-Douarnenez) a zo da vezañ diazezet e pep departamant ha pep "bro".

**S**pi zo eta da welout meur a ezel eus ar SGEN-CFDT o tont da reiñ skoazell da studierien Ke-vrenn Geltiek Skol Veur Roazhon e miz Du 1983, pa vint gant o "zro-Breizh" evit brudañ o stoum evit ar C'HAPES brezhonek. Spi zo ivez da welout izili sindikadoù lennerien all, petra bennak ma n'o defe ket diskleriet c'hoazh o aozadurioù e oant a-du gant ar pal-se. Spi...

UL LEVRIG 14 PAJENN (29,7 x 21)

UN ISTOR E BREZHONEG EEUN,

SKEUDENNET GANT 7 TRESADENN DA LIVAN EVIT BRASAN PLIJADUR AR VUGALE !

## 10 LUR NEMETKEN !

MA FELL DEOC'H DEGEMEROUT **NOTIC** EN HO SKOL PE... EN HO TI, SKRIVIT DA :

SKOL AN EMSAV - 8, STRAED HOCHÉ - 35000 ROAZON -

FREJOU KAS : 15% (BETEK 20)

EVIT NETRA...

MA C'HOUREC'HEMENNIT 20 LEVRIG PE OUZHPENN



## bremañ

## bremañ

Trugarekaat a reomp c'hoazh hol lennerien a gendalc'h da sikour SAE ha BREMAN. 1.780 lur profoù hon eus resevet dibaoe an niverenn 19. Trugarez ha... kendalc'hit !

Skrivit e-barzh

**E**mbannet hon eus 16 kartenn-post disheñvel (tresadennoù ha luc'hskeudennoù) evit brudañ ar stoum evit ar yezh hag hini ar panelloù-hent peurgetket. Hon sikourit d'o gwershañ. 2,50 l.an unan.

**A**n divniverenn eo a zeuio er maez evit miz Gouere hag Eost... Kasit ho lizhiri, ho pennadoù, ha komanantoù ho signoned a-benn an 30 a viz Even.

# bremañ 3 BLOAZ ...

**T**ri bloaz eo BREMAN... yaouankik c'hoazh. Tri bloaz zo e krogemp gant embann ur gazetenn daouveziek (unan ouzhpenn !) e brezhoneg. Peogwir e kredemp e rankemp labourat da sevel ur gazetenn-gelaouin, ur gazetenn-stoum en hon yezh.

Ha labourer hon eus. Ha peogwir ne gredeomp ket e oa a-walc'h gant ur gazetenn daouveziek hon eus klasket bezañ miziek... c'hwec'h miz zo BREMAN...

Ha derc'hel da labourat a reomp. Komananterien hon eus gonezet... Frouezh hon labour. Reoù all avat hon eus kollet. Abaoe ma 'z omp miziek dreist-holl. Evel pa n'hallfe ket Bretoned zo degemer soñj ur gazetenn vizek en o yezh... (A-benn pegoulz e vimp sizhuniek, neuze ?). Evel pa gavfent ez eus a-walc'h gant ar pezh a zo !

Kenderc'hel a reomp memestra... Gant ar spi e kresko al labous.. Aner larout e kontomp war hon c'houmananterien evit degas dezhañ ar pezh en deus ezhomm : BOUED, da reiñ nerzh. Evit komz fraezh : penna-dou, skeudennoù, tresadennoù... ha komanantoù.

D'an holl re n'o deus ket gortozet al linennoù-mañ evit hon kompren, TRUGAREZ.

BREMAN, ma c'hallfe ar re all hon c'hlevout ivez...

AR SKIPAILH.





## EMGLEV SEVENADUREL

Lakaet war ar stern gant SAE

**D**a geñver GOUEL AR BREZHONEG, d'an 22 a viz Mae 1983 e Pondivi eo bet pedet an holl strolladoù sevenadurel d'en em gavet asambles gant Skol An Emsav da c'houzout hag eñ e oa posubl en em glevout evit kas war-raok ar stourm evit hor yezh hag hor sevenadur. N'eo ket un daolenn eus ar re blijusañ he deus livet, met daoust ha n'eo ket spiswel :

### Galv Skol an Emsav

"Stag omp," eme Skol An Emsav en he c'halvaden, "gant ur prantad diaes met pouezus evit Pobl Vreizh, he yezh, he sevenadur. Pep emsaver, pep strollad hen sant ervat : n'omp mui boun-tet gant al lanv hon eus anavezet."

Fin ar bloavezhioù 60 ha penn-kentañ ar bloavezhioù 70 a zo bet merket gant ul luskad sevenadurel breizhek dibar a oa diouzh ar c'hiz : ar c'han (Glenmor, Stivell, Servat...), ar festoù-noz, ar sonerezh, ar yezh, sevenadur ar maezioù, a sache ganto ar yaouankizoù hag e tiwane aes ha buan ar strolladoù pe strolladigoù nevez. Ar stourm a oa alies evel ur gouel. Ar c'hresk ekonomikel a oa ivez en e barr uhelañ. Bez e oa Pobl Vreizh oc'h adkavout hec'h emskiant hag he c'hultur.

Un emroadur don a zo bet eta. Met tra ma oa al luskad o vont war faezhañ n'eus ket bet gounezet kalz gwirioù nevez (radio-tele-skolioù-buhez ofisiel). Neuze e voe divizet sevel DIWAN a roas tro d'an emsav evit ar yezh da vodañ en-dro dezhi an nerzhioù a oa bet dihunet gant hor stourmadou. An Talbenn Sevenadurel Araokour a voe krouet ivez da lakaat da gemer perzh en hor stourm, nerzhioù sosial pobl Vreizh, o vont ermaez eus ar metoù sevenadurel.

Setu deut ivez hor yezh da vezañ un dra tamm pe damm "ofisiel", ar "chart sevenadurel" zo arouez kement-se. Skolioù Diwan, al labour en aozadurioù ofisiel (Skol-Veur, skolioù, kuzul Sevenadurel, Skol Uhel Ar Vro, tiez-kêr, kevredigezhioù a-bep seurt) a zegas tud hag a vrud hor stourm, met lonkañ a reont ivez lod vrasañ an nerzhioù oberiant, mont a ra da hesk stivell ar re yaouank, dilezet 'vez tachennoù all, n'eus ket kalz brezhonegerien nevez. Ema ivez an enkadenn ekonomikel oc'h ober he reuz, niverusoc'h niverusañ an dud hep labour, ar re yaouank o klask o hent hag ul labour, o klask treuzvevañ en un en-dro kaletoc'h'h.

### Ur varnadenn c'harv

"Dilavar eo chomet an emsav sevenadurel pa n'eo ket hep sevel goulennoù. Strolladoù zo aet da get evel R.T.B.

Pa c'hwezhe an avel a-dreñv, pa oa ul labour brudañ d'ober, ne oa ket ken anat gwander an emsav sevenadurel. Pa c'hwezhe an avel a-benn, pa vez stourmoù resis da ren e teu sklaer ar mankoù. Julien COUTOULY, karget gant FR3 da sevel un danevell diwar-benn ar "yezhoù bihan" a skrive deomp "Ho strolladoù zo binvioù mat evit ar vuhez diabarzh, evit goulenn met pos evit tabutañ na kendivizout en diavaez gant ar galloud. Ho nerzhioù zo nannet etre chapelioù dispizius ha di-c'houest d'en em c'houzañv an eil eben". Na pet strollad le-c'hel a vev warniñ e-unan hep liam gant ar re all : o koll nerzh, amzer, ijin, skiant-prenet, hep pal na politikerezh boutin. Na pet den ne gav ket gwelloc'h surentez ha soulder ar soñjoù pe ar skridoù taer eget kiriegezh pemdez-iek ar stourm a vrasañ

war dachenn an ober e-barzh ar frammoù a zo diazezh pep stourm.

Pep hini o sachañ diouzh e du, ur wech unan, ur wech all unan all, ne reomp nemet foraniñ en aner hon nebeud a nerzh ha reiñ c'hoant d'an dud da chom er gêr.

N'eo ket poent ken termall eta. Mar kredomp ez eus un dra bennak d'ober c'hoazh evit hor yezh, ez eo anat ne vo ket graet hep lakaat e kont doareoù ober an emsav sevenadurel, da lavarout eo ivez an dud a zo sañset e-barzh. Ha ma rafemp eus an diaestrioù a-vremañ un digarez da gas war-raok ur stourm adnevesaet ? "

### Un emglev evit stourmoù resis?

A-du eo bet lod vrasañ ar strolladoù evit labourat asambles hag en em gavet o deus adarre an 12 a viz Mezheven evit resisaat o diazezoù. Da soñj Skol An Emsav, e tlefe an emglev-mañ bezañ disheñvel mat eus an Talbenn Sevenadurel Araokour. Dre m'en em gav asambles an Talbenn strolladoù politikel diouzh un tu, sindikadoù ha strolladoù sevenadurel diouzh un tu all, ez eus tu d'ober ul labour don war dachenn ar preder. Enket e seblant avat war dachenn an ober. Gant ur vuhez demokratel o vont war-raok e veler ivez muioc'h-mui a guzioù ofisiel e-lec'h ma vo kavet asambles tud dilennet en anv strolladoù politikel, sindikadoù, strolladoù a bep seurt, evel "Kuzul ar Selled ha Kleved". Daoust d'ar palioù boutin a zo etre strolladoù politikel, sevenadurel ha sindikadoù a-gleiz e vo ret moarvat d'ar c'hevredigezhioù sevenadurel bezañ gouest da gomz en un doare emren ha da gaout a-walc'h a-bouez evit ma vo dalc'het kont eus o ali.

T.L.

# AR PESKED HAG AL LABOUSED

**W**ar c'houlenn SKOL AN EMSAV e oa en em gavet un daou ugent bennak a dud d'ar Sul 22 a viz Mae diouzh ar beure e Pondivi, sul Gouel ar Brezhoneg. Piv 'oa an dud-se ? Dileuridi ar c'hevredigezhioù sevenadurel, an aoleoù breizhek, ar strolladoù ha kement hini c'hoant gantañ (-ti) ober "eus an diaestrioù a-vremañ un digarez da gas war-raok ur stourm adnevesaet" (sic).

Deuet e oant holl, pas eus ken pell ha Bro Itali met piv oar ? Deuet e oant holl, breudeur-enebourien familh bras an emsav sevenadurel, tud penn a-raok ar stourm ha tud ar penn a-dreñv, mignonned subjel vel ar brezhoneg hag e ene vrien objektivel, ar

naos bodañ asambles war hirdermen, ar pesked hag al laboused ? Ar pesked-nij n'int nemet direizhderioù ral en natur.

Araok pep tra, me a gav din, e rankomp prederiañ e diabarzh Skol An Emsav (hag a zo c'hoazh e penn araok ar stourm foran evit hon yezh) da c'houzout n'eo ket hepken ar pezh hon eus d'ober da zifenn ar brezhoneg ha kas anezhañ war-raok, met dreist-holl da c'houzout sklaer ar pezh a fell deomp ober gantañ. A-benn bezañ gouest da respont d'ar goulennoù-mañ : perak derc'hel da stourm evit ur yezh o vont da hesk e-touez hon fobl ? Pe-seurt statud a fell deomp gounit eviti, hini ur yezh hiniennel evit un nebeud tud a garfe ober



gaeltogerien unvanour hag ar wenedourien anaozav, ar rannvroelourien c'hall hag ar vroadelourien vrezhon, alibi ar P.S. ha fan-club ar PCF, an otomomist hag an disranerien... Deuet e oant holl, "ar re a gred e Doue hag ar re ne gredont ket" da lidañ ofereñn an unvaniezh, da gannañ Credo ar brezhoneg ha kantik "Dalc'hmata 'vez un dra bennak d'ober", war don "Da Feiz hon Tadoù Kozh". Ite Mis-sa est ! Poent distaliañ...

Pal an emvod hervez ar bedadenn : "en em gavout diwezhatoc'h evit kenderc'hel al labour marteze". Kaos 'zo bet memes eus sevel un emglev... Breizh ! "Pegen diaes komz kalz hep larout un dra bennak a re", a lare Loeiz XIV a Vro C'hall. Ne fell ket din enebñ ouzh Tangi Louarn, ez-personnel, sekretour an Talbenn Sevenadurel (T.S.A.B.) anezhañ, dre ma ouzon ervat pegement a labour en deus sammet war e choug, pegement a emroüsted en deus "pastet" e-barzh ar stourm evit hon yezh. Met larout memestra ne gomprenan ket mat penaos, goude c'hwitadenn an T.S.A.B., e c'hellfemp sevel un "emglev" pe un "talbenn" all war hir dermen gant aozadurioù pelloc'h diouzhip war dachenn ar soñjoù kevredigezhel hag ar menozioù broadel. Pe-

ganti pe hini ur pobl ? Ur yezh sevenadurel pe ur yezh kevredigezhel ? Ur yezh kentañ pe ur yezh ouzhpenn ?

Pa vo bet savet (pe ad-savet) un diazezh teoriennel d'hon stourm, ha d'ar poent-se nemetken, eo e vo tu da vodañ an dud, ar strolladoù, ar c'hevredigezhioù da reiñ lañs dezhañ. Da sevel un emsav efedus dre m'en devo diazezoù start.

N'eo ket evit se ne vo ket du da c'hervel, a vare da vare, evel ma ra ar sindikadoù pe ar strolladoù politikel, izili kevredigezhioù pe strolladoù all d'en em vodañ ganeomp da sevel "devezhioù" evel Pondivi e 1983 pe Wen-gamp e 1975 a-benn gounit un dra resis. Ur seurt "unvaniezh sakr" war verr-dermen. War hir-dermen avat, ne vimp efedus nemet dre ma vimp bet gouest da embann sklaer ar pezh a fell deomp evit hon yezh, hon fobl, ha gant hon fobl. An diazezoù, evidon, n'hellont bezañ nemet broadelour, par d'ar re a vez o harpañ hiziv an deiz stourm ar c'hembraeg, an euskareg pe ar c'horseg.

Herve ar Beg.



Ur wech e oa...E Pondi...

## GOUEL AR BREZHONEG

Ur wech e oa, e kêr Bondi, tud o lidañ ur gouel, hini ar brezhoneg sañset. Aozet mat e voe, e-pad mizioù hir, gant tud a youl-vat, bodet en-dro d'o c'harantez e keñver yezh hon bro. Labourer o devoa a lac'h korf (darn anezho d'an nebeutañ), evit kinnig meuzioù li-pous d'an holl arvesterien, pedet da sellet ha da glevet abadennoù gouest da derrañ naon ar re figusañ anezho. Met trenket he deus ar geus-teurren diouzhtu koulz lavaret :

- Re yen ar soubenn evit lod a gave e veze re a dud o "c'hallzhonegañ" a-leizh o genou.

- Re grazet ar c'hig evit padred ar gwenedeg mod-kozh, a oa chomet e korn o oaled forzh penaos, feuket maz oant gant ar plas diste-rik a-walc'h a oa bet roet d' o rannyez santel hervezo.

- Re zous ar c'hram-pouezh evit ar re a grede ad-kavout, evel e Gwengamp ar bloaz tremenet, ur spered breizhat bennak e-doug devezhioù gouel brezhonegerien an emsav.

- Re dreutik niver ar glianted, a lavare dreist-holl keginerien ar fest, man-tret gant niver dister an dud o doa kredet dont a-benn ar

fin (1.800 arvester en holl, paeet ganto bilhiji evit dont e-barzh). An toull er c'hef (war-dro 1,7 milion) a verk anat peseurt diaesterioù e c'hell kaout tud o terc'hel ur stal-ostaliri e Bro (G)Wened en amzer a-vremañ.

... Ur wech ne oa ket, neuze, laouen an holl gwitibunan o tont en-dro d'ar gêr o soñjal en holl boanioù gouzañvet gant tud Oaled breizhek Pondi, Divan an Oriant, Sine Klub Roc'h-an, ha Skol An Emsav, ha disoc'h mezhus ha truezus an trevell bet sevenet ganto.

... Ur wech e vo, gouelioù all gant ur spered sklaeroc'h ha laouenoc'h war un dro, hag ar berzh en deus graet ur strollad nevez savet e-giz Branvor ne vo ket evit dislavaret ac'hanon.

G.S. : keit ha ma vo gwelet ar banne Guinness, chouchenn pe whisky evel arouez nemeti eus ar geltiegezh, e-lec'h sevenadur gwirion hon broioù ni, spi ebet da gaout e vo gwellaet stad hon yezhoù.

(Skrivet gant un den en deus graet war-dro ar gouel hag a soñj dezhañ e c'hell bezañ frouezhus ar pennadig barn/emvarn-mañ. Bet skrivet un eurvezh goude fin an abadennoù.

Yann-Ber Delisle

## PEBEZH

Petra zo nevez gant Strollad Plouguin ?

A-benn kreiz miz Mae, e vo savet ur pezh-c'hoari nevez diwar-benn an amzer vak.

Perak an danvez-se ?

C'hoant hon eus bet sevel un abaden tost eus buhez an dud. Plas an amzer vak a zo pouezus evito. Emaomp tost eus ar 35 eurvezh-labour. Muoc'h a amzer a vo evit diduiñ hag evit ar vakañsoù. Setu hon eus en em soñjet diwar-benn pezh a ra an dud pa ne labouront ket.

Petra a ra an dud e-pad o amzer vak ?

Ur bern traoù a vez kinniget dezho. Oberiantizoù da goñsomiñ (beveziñ), lod all disheñvel e-lec'h ma vezer aktour. Er pezh-mañ e c'hoariomp an amzer vak en un doare plijus ; klask a reomp sevel ur gouel. Diskouezet 'vez ar chasseurien gant o buhez, kudennoù an dud a vez nec'het o c'hortoz o bugale aet da rouliñ o yaouankiz e-pad an nozvezh a-bezh.

Kavzel 'nit ivez eus hirri-tan ha gwallzarvoudoù a errou war an heñchoù ?

Ya, ar vuhez-noz a vez skuizhus evit ar re yaouank o tistreiñ eus an ostalerioù, an toullou-kuzh pe ar salioù-dañsal. Evit ur bern re yaouank (ha re all), an amzer vak a vez tremenet en ostalerioù oc'h evañ hag o lonkañ. Trist eo pa ne vez nemet an dra-se. Pebezh diduamant ! Diskouezet a reomp ivez er pezh nevez, plas ar football hag

ar velo, gant an darempredoù a vezetre ar c'hoarierien hag ar sellerien.

N'ankounac'hait ket buhez ar re gozh kennebeut ?

Nann, evel-just ! Gwechall, pa oant yaouankoc'h, ar re gozh a veze plijet gant nebeud. Al labour a oa ar pouezusañ, ne chome ket kalz amzer evit an amzer vak. Koulskoude, ar gouelioù a oa neuze, a veze dedennus, gwirizennet e-barzh buhez an dud (ar pardonioù...). Hiriv, ar re gozh o devez kerse d'an amzer ma 'z aent d'an oferenn hag e kavent o holl amezelen war ar blasenn goude-se. Hiriv, ar re gozh a vez lojet er bourk. Monet a reont da c'hoari domino kenetrezo ur wech an amzer.

## ABADENN

Petra eo pal ar Strollad en ur ziskouez ar pezh-c'hoari-se ?

Fellout a ra deomp ledanaat tachenn ar c'hoariva brezhonek amañ en hon c'hornbro da gentañ.

Er pezh-mañ e tiskouezimp war al leurenn buhez tud ur barrez diwar ar maez e Bro Leon pe e lec'h all zoken !

Klask a raimp lakaat an arvesterien 'barzh an taol, lakaat buhez en ur c'hoari pennadoù eus ar pezh e-touez an dud. Evidomp eo pouezus sevel abadennoù pobl evit kas ar c'hoariva brezhonek war-raok, sevel traoù sirius en ur farsal !

C'hwi a gav deoc'h e teuo an dud ne reont ket forzh eus ar c'hoariva brezhonek da welet ac'hanoù ?

Setu aze ur goulenn plijus ! Stourmerien omp ha fiziadus hon eus da vrudañ al labour a reomp ma teuomp a-benn da ginnig un abaden vrav, farsus, aes da gompren, ha ma 'z eomp da c'hoari anezhañ war ar maez. Kalz labour a chomo d'ober evel just. Forzh penaos, plijadur hon eus o sevel ar pezh-mañ e-pad hon amzer vak deomp-ni.



strollad plouguin

## DIZOLOIN BRO-ROSTREN

- G = Gwelvel = GROVEL en Breton
- P = Pêlaouf = PELLAN
- L = Lanrivain = LANUVEN
- T = Tremargad = TREMARGAD



T. Tremargad - L. Lanrivain - G. Gwelvel - P. Pêlaouf

Gant kelennerien ha skolidi eus LEP Rostren ez eus bet savet hevlene ul levrig e galleg diwar-benn o bro. Ul lod mat eus al labour a denn d'ar brezhoneg.

Aet e oa ar skipailhoù da c'houlennta tud eus parrezioù Grovel, Tremargad, Lanrivain ha Pelant ha da zastum danvez diwar benn ar yezh evel just, hag ar medisine-resh, an diduamantoù, ar binvioù kozh da labourat an douar ivez.

En enklask e vez gwelet ez eus bet kosmet brezhoneg gant 52 % eus an dud d'o bugale, met kalz nebeutoc'h e Grovel hag e Pelant, (ha 48 % n'o deus ket graet). Met ral eo hiziv ar re a gomz brezhoneg d'o bugale.

41 % eus an dud a c'houlennt muoc'h a vrezhoneg er skinwel, 19 % zo a-enep, ha

42 % a c'hoantafe ur pevare chadenn e brezhoneg, 33 % o vezañ a-enep.

66 % a lar eo bet difennet dezho komz brezhoneg er skol. 62 % a garfe e vije kelennet brezhoneg d'o bugale er skol, ouzhpenn ar galleg, ha 26 % a gav reizh e vije RET deskiñ anezhañ e Breizh, ar re all direkt. E 1981, eo 50% eus tud bugale CES Bennac'h a gave e oa reizh e vije RET.

10 % eus an dud zo a-enep skolioù DIWAN, ar re all zo troet mat gante (90 %).

Evit a sell dazont ar yezh, 57 % a vel an traoù fall. Barn a reont, a gav din, labour ar gouarnamant evit ar yezh. Hag hini ar stourmerien ivez.

(10 Lur an tamm digant:L.E.P. Rostren - 22110-).

M.K.

Ti-Krampouezh  
BAR  
"chez tom"  
18, st. an Itron Vari  
29 260 Lesneven  
83 15 14

# UR SINDIKAD WAR HENT AN "DIVROADELAAT"

KENDALC'H C.F.D.T. AL LABOUR ( S.N.T.E. - C.F.D.T. )

digreskin an amzer-labour da 35 eurvezh diouzhtu evit krouin plasou nevez / derc'hel d'ar goprou d'an nebeutan betek 2 wech ar gopr izelan goulennet (8 400 lur)

**E** Bro Okitania, er PRADET, e-kichen TOULON, eo bet dalc'h kendalc'h C.F.D.T. an S.N.T.E. (Syndicat National du Travail et de l'Emploi) etre ar 25 hag an 29 a viz Ebrel 1983. Pouezus eo ar c'hendalc'h-se e meur a genver. Da gentañ, peogwir e vod ar sindikad-se labourerien eus Ministrerezh al Labour hag eus an A.N.P.E. ("Agence Nationale Pour l'Emploi"), hag o deus ur plas bras-kenañ e buhez ar gevredigezh er mare-mañ, atalamour d'ar c'hudennou stag ouzh al labour, an dilabour, hag al lezennou nevez evit an dud implijet (lezennou AUROUX). Da eil, peogwir ez eo c'hoazh an S.N.T.E. unan eus sindikadoù "broadel" diwezhañ ar C.F.D.T. gant hini an Tailhou da skouer, hag emañ da vezañ diskaret a-barzh nemeur, hervez ar reolennoù nevez bet savet gant ar C.F.D.T..

Gant 38vet kendalc'h ar c'hengevredad (confederation) C.F.D.T. (da lavarout eo bodad an holl sindikadoù ha kevredadoù (federations) C.F.D.T.), e Brest e 1979, eo e oa bet divizet kas da get an holl sindikadoù "broadel" a-benn ar c'hentañ a viz Genver 1983 (un tamm dale zo, evel ma weler). Perak ur seurt diviz ? Daou abeg a zo dezhañ. Da gentañ er sindikadoù "broadel" eo bihan-tre niver an izili e-keñver ar c'hevredadoù bras. Ken e weler ur sindikad evel hini an S.N.T.E. (2.400 ezel) war ar memes renk hag ur c'hevredad bras evel hini ar vetalou-rieh da skouer (dek miliadoù a izili). Re zisheñvel eo eta o fouez gwirion e-keñver ar pouez politikel a c'hellont kaout, ha ret e oa eta bodañ ar sindikadoù bihanañ kene-trezo.

An eil abeg a glot gant an demokratelezh da diazezoù ar C.F.D.T.. Fellout a ra d'ar C.F.D.T. sevel ur gevredigezh sokialour emeret ha dre-se lakaat ar sindikadoù

da vezañ tost eus an dud, war an dachenn, da labourat kene-trezo, da brederiañ ha da zivizout asamblez evit mirout ne zeufe diwar-c'horre nemet ar c'hoant da zifenn o micher ("corporatisme"). Sindikadoù bihan, o vodañ tud eus micherioù disheñvel, met kevredet kenetrezo eo a fell d'ar C.F.D.T.. Neuze e ranko a-benn nebeut sindikad "broadel" al labour (S.N.T.E) bezañ adframmet, dre zepartamant pe dre rannvro : ar c'hevrennoù (departamant pe rannvro) anezhañ a gavo o flas neuze e-barzh sindikadoù ar c'hedskor (securite sociale), diazezet war an departamantou(1) ha bodet e-barzh kevredad ar c'hedskor. Div rann vras a vo koulskoude ar c'hevredad peogwir e vo diouzhtu un tu rann ar GWAREZIOU SOKIAL (Kedskor, URSSAF, aozadurioù kenskoazell, asurañsoù retred...) ha diouzhtu an tu all ar rann LABOUR, IMPLIJ, STUMMADUR o vodañ Ministrerezh al Labour, an ANPE, an AFPA, an ASSEDIC.

Degemeret fall a-walc'h eo bet seurt emdroadur gant kalz eus ar sindikadoù "broadel" en derou ha stourmet o deus a-enep zoken alies. Enebiezh a zo bet a-berzh: ar re a oa e penn, meur a wech, rak ul lodenn eus o c'halloud eo a vez tennet diganto. Met tamm ha tamm, ha gant pouez an diaz (base) a zo deuet ivez da gompren an ezhomm da labourat gant an dud all war al lec'h, eo aet ar soñj war-raok. Evit ar Vretoned, evit pobloù all Bro-C'hall, hag evit rannvroioù zo e oa diaesoc'h tapout krog e rene-rezh ar sindikadoù a chome kreizennet e Paris. Kalz brasoc'h eo pouez an ezel o chom e kêr-benn Bro-C'hall eget hini ar paotr pe ar plac'h o vevañ e Montpellier pe e Mont-troulez. Kalz aesoc'h eo ivez bezañ ezel eus an aozadurioù- ren pa vezer war ar plas, e-kichen ar galloud, pa n'eus ket da dremen hanter e amzer en tren, gant ar skuzhder, ar c'hudennou familh, hag all a zeu da heul.



## Peseurt "kenskaozelloù nevez" !

Kudenn vras an divizoù e-pad ar c'hendalc'h a zo bet hini ar "c'henskaozelloù nevez" evel ma oad o c'hortoz: gant diaesterioù al labour, gant an enkadenn dre vras, penaos reiñ ur plas-labour da bep hini o rannañ an amzer-labour etre an holl. Meur a desenn a zo : diouzhtu un tu, hini ar re a soñj "n'o deus ket al labourerien da baeañ evit un enkadenn a zo hini ar gaptalourien". Goulenn a reont eta vefe digresket an amzer-labour da 35 eurvezh ar sishun diouzhtu evit implij muioc'h a dud hag o terc'hel d'ar goprou hep koll ebet. An arc'hant a vefe kavet a-drugarez d'ur produadur brasoc'h hag ivez o terc'hel an arc'hant a ya kuit en diavaez (e-barzh bankoù Bro-Suis) hag o lakaat an embregerezhioù da baeañ o zleoù d'an URSSAF da skouer. Prest e vefent da stankañ harzoù ar stad c'hall ivez mard eo ret. Tost a-walc'h int eus soñjoù ar C.E.R.E.S. pe an L.C.R.. Soñjal a ra dezho ne ren ar gouarnamant a-vremañ nemet ur politikerezh e servij ar vourc'hizien hag an arc'hant, ha fellout a ra dezho enebañ outañ war-eeun evit e lakaat da blegañ, koustet a gousto.

Diouzhtu an tu all avat, hag ar muiañ niver a zo aet ganto evit ar wech kentañ e-barzh ar sindikad S.N.T.E., ez eus darn ne nac'hont ket emaoep e-barzh enkadenn ar sistem Kapitalour, met euniek, dañjerus ha diboeil e kavont an diskoulmoù kinniget gant ar re gentañ : "Ret eo, emezo, kas war-raok stourm ar sindikad a renkad hag a yoc'h e gwirionez, e-lec'h ma vo en o bleud ar merc'hed, ar re yaouank, al labourerien distabil, e-lec'h ma vo ar pallioù kentañ krouin plasou-labour, krennañ an dibarderioù (inegalite) ha n'eo ket difenn hep diforc'h ebet ar pezh zo bet gounezet gant

al labourerien a zo dija gwarezet ar gwellañ". Aon o deus koulskoude e vefe kredet gant tud zo ez eo an doare-se da welet an traoù asantiñ tamm ha tamm da bouez ar politike-rezh ekonomikel evel m'eo termenet gant ar gouarnamant, pe, gwashoc'h, en em ober diouzhtu ur sistem a gas d'un hent dall. Lakaat a reont e kont ivez an eskemmoù direizh gant broioù an Trede Bed, nac'hañ a reont mont e-barzh c'hoari an enebiezh etre an daou vloc'h "sokialour" ha "kapitalour". Fellout a ra dezho bountañ war stourm ar sindikadoù en Europa en he fezh en un doare unvan ha sevel un dachennad sokio-ekonomikel europat nevez. Goulenn a reont neuze e vefe digresket an amzer-labour da 35 eurvezh en ur wech hepken, evit ma vefe krouet implijioù e gwirionez, hag e vefe dalc'het ar goprou hep koll ebet, d'an nebeutan betek div wech ar gopr izelañ a c'houlennont (8.400 lur ar miz e miz Ebrel 83). Met, eveljust, rannoù all ar gevredigezh (patroned, micherioù dieub, artizaned...) a rank ivez sammañ o lod. Pouezañ a reont ivez muioc'h war ar sokialouriezh demokratel hag enveret a enebont ouzh galloud ur stad hep bevnen ebet ha dañjer an hollveouriezh (totalitarisme).

Mard eo aet ar maout gant ar re-mañ ez eo moarvat peogwir e sant an darn vrasañ eus an dud pegen start e vo dont er-maez eus an enkadenn, met ivez peogwir ne gredont ket en diskoulmoù re eeun ("ar re binvidik a rank paeañ") hag e fell dezho, adalek bremañ, labourat da sevel ur gevredigezh rei-shoc'h hep gortoz donedigezh an "abardaevezh meur".

Tangi Louarn

(1) E Penn Ar Bed ez eus daou sindikad ezel eus kevredad ar c'hedskor : unan en hanternoz (Leon) hag unan er c'hreisteiz (Kerne).

**F**all ar jeu gant ar brezhoneg er radio : emañ Rozenn Milin o paouez reiñ he zavañjer ha war a-lavarer e vo graet kement all gant Remi Derrien a-benn nebeut. Ni, paour-kaezh selaouerien, a soñje deomp e oa diazezet mat ar brezhoneg e radio nevez Kemper. Daoust d'e blas bezañ treutik c'hoazh, e oa aet ar brezhoneg un tamm mat war-raok memes tra e-keñver radio e-kerz ar bloavezh tremenet. Tizhout 5 eurvezh hanter e brezhoneg a oa bet goulennet gant kuzul Departamant Penn Ar Bed ha seblant-tout a rae an dra-se bezañ posubl ac'hann da zaou vloaz pe dri. Siwazh ! Biskoazh n'hor befe soñjet ni, paour-kaezh selaouerien RBI, e oa ken start an traoù e ti Kemper hag e veze kement a drouz evit derc'hel e blasig d'ar brezhoneg ! Bremañ ez eus anv zoken da ziskar abadenñ holl-vrezhonek peder eur-pemp eur abardaez, na petra 'ta !

Estreget e Radio Breizh Izel he deus hor yezh diskoezet beg he fri : e radiooù bihan all e-kerz ar bloavezh tremenet he deus graet ivez, ha komz diwar o fenn a ranker evit klokaat an daolenn. Goulenn a ra "Emglev Bro-Leon" diganin kontañ penaos e tro an traoù du-mañ war dachenn ar skignañ brezhoneg dre radio.

E Bro-Leon ez eus 3 radio a glevet brezhoneg enno - "RADIO BRO-LEON" diazezet e Lesneven, - "RADIO EMERAUDE" diazezet e Plougerne, - "RADIO BREST-ATLANTIQUE" diazezet e Brest.

Pedeur eurvezh a vrezhoneg a vez bep sishun war "Radio Bro-Leon". Teir eurvezh pe bemp (n'ouzo ket just) war "Emeraude", gant Goulc'hen Kervella ha Jerar Gwenn ; kreñv eo nerzh ar skingaser-mañ ; e-barzh e gelañ-hiad-skignañ emañ al lodenn vrasañ eus Bro-Leon. War "Brest-Atlantique" e veze klevet brezhoneg bemedez war ar sishun, poent 'zo bet, da vare koan, etre 7 eur ha 7 eur 30. Ne gav ket din e reer bemedez bremañ avat. Hervez ur skrid-emglev a oa bet sinet gant RBA ha ti-kêr Brest e oa bet dalc'het un eurvezh 3'ar brezhoneg bemedez e taolenn ar programmoù. Merket sklaer eo war baper eta, ha ma vefe kavet a-walc'h a vrezhonegerien da azañ an eurvezh vrezhonek bemedez n'hellfe renerien RBA nemet asantiñ.

Ha radio KLT, penaos emañ kont gentañ ? Pal skipailh KLT e oa sevel ur radio hollvrezhonek (pe "e brezhoneg dreist holl") e korn-bro Montroulez. Dre zioer a arc'hant avat, n'eus ket bet tu prenañ ardivinkoù, ha sac'het eo an traoù evit ar poent, 'm eus aon.

Ez an da gomz bremañ diwar-benn ur radio a anavezant gwelloc'h eget ar re all : hini korn-bro Lesneven. Warlene e oa bet roet lañs dezhañ e dibenn miz Here gant un toul-ladig tud yaouank, ha dibabet an anv brezhonek dezhañ kement hag ober : "RADIO BRO LEON" mar-plij. Diskanañ a voe graet buan avat ! Ken fall e veze distripet an anv-mañ gant lod eus an animatourien zivrezhonek, m'o doa komprenet selaouerien zo e oa "Gros Léon" anv ar radio nevez !



# AR BREZHONEG E RADIOOU BIHAN BRO LEON



E kêr Lesneven emañ e lojeiz, betek trowardroioù Brest ez eus moaien e glevout. Kalz traoù kaer a oa bet merket da baliou dezhañ : mershekaat buhez kevredigezhel ar c'horn-bro-mañ, reñf ar gomz d'an dud, hag all, hag all, pesh a oa mat kenañ, aner lavarout. Unan eus ar paliou a oa difenn yezh ha sevenadur Breizh : "rhabilitier" e oa ar ger implijet. Ret e vefe bet bezañ pounnerlev evit chom hep esañ ober un dra bennak.

Setu 'ta savet buan-habuan ur skipailh vrezhonegerien, dek bennak a dud e-barzh. Abaoe c'hwec'h miz e skignomp un hanter eurvezh vrezhonek bemdez, etre kreisteiz hanter hag un eur ha bep sul eo un hir a abadenn a reomp war he zro da boent mern, etre 11e30 hag 1e. Bec'h a zo warnomp evit dont a-benn rak en em sifreñf a ra pep hini ac'hanomp dija war dachenn ar brezhoneg, hag al labour radio a zo ur samm ouzhpenn e-vidomp. Klasket hon eus ledanaat hor skipailh met n'eus ket bet tu abalamour d'ar guddenn-mañ dreist-holl : ouzhpenn komz ouz ar mikro e rank ar memes den ober war-dro an teknik ivez, rak an aliesañ n'eus ket tu deomp ober e mod all.

Gant nebutoc'h eget tri milion a lurioù kozh eo bet loc'het an traoù. Er penn kentañ e oa ur gwir jinastik lakaat hon abadennoù da dremen. Gwellat eo bet un tammig abaoe, met chom a ra kasañ ar c'hudennou teknik. Stallet eo bet an ardivinkoù war ur seurt kontouer ken uhel hag un aoter pa vezomp oc'h ofereñf e reomp gant un troer-pladennoù en tu kleiz, hag unan all en tu dehou ; etre an daou-mañ ez eus un daolennad vountounoù a reer "taolenn-veskañ" anezhi ; ha dirazomp ur mikro stag ouz beg ur seurt barrenn houarn a ziskenn eus an doenn(e-barzh ar c'halatres emañ ar studio). Plas ebet evit dispañ levr pe bapierioù da lenn. E-pad 2 viz eo bet dañjerus lakaat e zorn war ar mikro (priz heñf 150 lur) ; alies eo bet c'hoarvezet gantañ kouezhañ a-greiz holl war bountounoù an daolenn veskañ. Evel na oa riskluz da bep hini ac'hanomp lakaat a-feson ar mikro dirak e c'henou e ranke ar genoù mont da gaout ar mikro. Dre forzh gweañ hor gouzout

e teuemp a-benn.

N'eo ket er c'hudennou teknik emañ an dalc'h brasañ koulskoude, rak buan a-walc'h e teuer a-benn da c'hoari de-reat gant boutounoù an ardivinkoù. Kasañoc'h 'zo : gwall bell emañ programoù "Radio-Bro-Leon" diouz ar paliou a oa bet merket war baper. Nerzhekaat buhez kevredigezhel ha sevenadurel ar c'horn-bro? Reñf ar gomz d'an dud ? Gant sonerezhioù giz saoz pe amerikan e seblant bezañ interestet an darn vrasañ eus an animatourien ha setu tout. Brudañ muioc'h c'hoazh ar pezh a glevur noz-deiz e pep lec'h -setu 'pezh a vez graet. Kannerien zivrud hor bro, ar re lezet a-gostez gant ar mediaoù bras, ne glevet ket anezho aliesoc'h er radio du-mañ eget e radiooù bras Pariz ! Adra sur emañ an darn vrasañ eus selaouerien "Radio-Bro-Leon" dindan 20 vloaz. N'eo ket en o zouez avat emañ al lodenn vrasañ eus ar vrezhonegerien ! Krog omp d'en em c'houlenn ha cheñch a raio doare ar radio-mañ. O forañf nerzhioù emomp marteze evit un niver re zister a selaouerien. N'eo ket tamm ebet e vefemp a-enep d'ar sonerezhioù diouz ar c'hizh, ha funk pe bunk e vefent. Met re 'zo re, ha setu tout. Traoù punk-funk skignet dreist muzul a-hed an devezh n'hellont ket plijout d'an tri-c'hard eus an dud. Liesdoare e rank bezañ ar radioù-lec'h gwirion.

Ma fell da Leoniz o chom e-kreiz Bro-Leon selaou an abadennig vrezhonek a skignomp bemdez e c'hellont tapout anezhi war 104 Megahertz. En em c'houlenn a ran avat hag eñ e vimp c'hoazh er memes ti pa vo deuet er-maez ar gaze-tenn-mañ. Marteze e vimp aet da lec'h all da glask fred.

Petra soñjal diwar-benn ar radioù bihan a-benn ar fin ? Daoust ha fae hon eus d'ober warno war zigarez ez int re zister ? Ne gav ket din. Strivou skipailh "Radio KLT" a seblant diskouez n'omp ket krefoù a-walc'h c'hoazh evit sevel penn-da-benn ur radio lec'h hollvrezhonek. Neuzze, da c'hortoz, e tlemp lakaat ar muiañ posubl a vrezhoneg e-barzh ar radioù-lec'h. Ahuziñ amzer e vefe klask silañ brezhoneg en holl anezho. Ouzhpenn un hanter anezho a zo re gamm ha moarvat

ne badint ket pell. Pa vezont stabil a-walc'h avat, ha pa vezont digor da dud ha da venezioù a-bep seurt e vefe sot chom hep klask plantañ e-barzh ar muiañ posubl a vrezhoneg. Pa vez savet propik a-walc'h ur radio bihan, e soñj din en devez muioc'h a selaouerien eget RBI er gomz e-lec'h m'emañ e skingaser, hag er parrezioù e-kichen. Evit doare eo stankoc'h niver selaouerien "Emeraude" eget hini selaouerien RBI tro-dro da Blougerne. Diaes e vefe hen prouñf evel just, met diouz ar pezh a glevañ a-gleiz hag a-zehou e tiskouez bezañ gwir.

Amañ e Bro-Leon e tlefe bezañ lakaet un eur e brezhoneg bemdez war "Brest-Atlantique" ivez, peogwir ne c'hell renerien ar radio-se nemet asantiñ gant seurt menoz. Gant tost da zaou c'hant mil a dud o chom e Brest eo souezhus bras memes tra ne zeufed ket a-benn da strollañ a-walc'h a vrezhonegerien da ziazeañ mat plas ar brezhoneg e-barzh ! Aesoc'h zoken e tlefe bezañ sevel abadennou war RBA eget war "Radio Bro-Leon" dre ma vez avat un tekniñsian oc'h intent ouz an ardivinkoù eno !

Ma vefe prest lennerien 'zo d'ober un dra bennak ar gwellañ tra a c'hellfed aliañ dezho eo mont e darempred gant "Emglev Bro Leon" a zo e bal kenurzhiañ an traoù un tammig e Bro-Leon war dachenn ar brezhoneg (sekretourez : Joelle Perrot - Skol Diwan - 29214 Lanniliz).

Evit echuiñ va fennad ez an da lavarout ur soñj bennak diwar-benn "Radio-Breizh-Izel". Anat eo emañ RBI gwall bell diouz ar gwir servij radio a zo ezhomm e Breizh. Met RBI zo anezhañ, ha da c'hortoz gwelloc'h ez eo un nevezinti a-bouez e buhez tri eus departamantoù Breizh. Mantrus e vefe lezel da vezañ distreset ar pezh a oa bet tu lakaat da vale e-barzh. Mont war-gil e vefe, ha netra ken. Ranezenniañ a c'heller ober atav, met n'eo ket un avañf. Evit ar poent, hag er stad m'emañ an traoù, eo R.B.I. ar gwellañ benveg e-touez mediaoù Breizh da zegas un tamm startijenn d'hor yezh, a gav din.

Jorj Gwegen.

# FR3 : TROC'H ETRE AL LABOURERIE HAG AR RENERIE

Holl zileuridi an implijidi o deus kuitaet a-greiz holl emvod Kuzul Kreiz Embregerezh FR3 d'ar 25 a viz Mae diwezhañ, da lavarout eo an holl re a oa deut en anv ar sindikadoù CFTD, CFTC, CGT, CGC, FO, SCORT, SNJ hag eus pep rannvro FR3. Petra 'zo kaoz ?

Rebec'h a ra labourerien FR3 e vefe kemeret "divizoù evit diazezañ frammoù ar rannvroioù, evit politikerezh ar postadurioù, evit hini ar programoù a ya an eil re enep ar re all, hag a zo kontrol d'al lezenn. Lakaat e vez ekont ar rannvroelaad ha roll FR3 da grouiñ ha da broduiñ programoù", emezo.

N'eo ket c'hoazh savet budjef 1983. Rebec'h a ra c'hoazh ar sindikadoù "ne vefe kendiviz ebet diwar-benn an dibabou" daoust d'ar pezh a rankfe bezañ tro-spered ur "gevredigezh vroadel", met ivez daoust da lezennou al labour (Mellad L.432 1. lezenn-naoueg al labour). Ne ouezer ket atav petra vo roll ar programoù nevez. Ha koulskoude eo c'hwet bodad ar renerien, hag int, diefedus ha dic'houest da zivizout un dra bennak. Kemennet o deus ar sindikadoù e rafent harz-labour d'an 9 a viz Mezheven ma n'eus cheñchamant ebet.

### AN DISMEGANS EVIT AR BREZHONEG HAG AR PRODUADUR E BREIZH

Sindikadoù SNRT-CGT, SFRT CGT hag SNJ-CGT Breizh ha Peditoer, diouzho zo, o deus savet un diskleriadur o tamm politikerezh ha dibabou FR3 e-keñver yezh ha produadur, sklaer eo ar sifroù pa seller ouz budjetoù an abadennou.

.Roet e vez :  
-1600 lur gall ar vunutenn evit un abadenn e brezhoneg (Breizh o vev),  
-3800 lur gall ar vunutenn evit un abadenn rannvro e gallez,  
-etre 8000 ha 10 000 lur gall evit un telefilm "broadel" (sine 16).

Gwashoc'h eo c'hoazh pa seller ouz ar goprou : ar produktour a vo roet dezhañ 6000 lur gall gopr evit pemp munutenn abadenn e gallez tra ma vo 4000 lur gall aluzenn ar produktour brezhoneg evit 26 vunutenn abadenn ha koulz lavarout ur miz labour.

### HA LEZENN NEVEZ AR SELLED HA KLEVED ?

Kement-se a zo kontrol a-grenn, eme ar sindikadoù CGT, da lezenn nevez ar selled ha kleved (lezenn 82.652 an 29 a viz Gouere 1982) a zo en he diazezoù "kas war-raok ar yezhoù ha sevenadurioù

rannvro". "Seurt budjetoù a lak anat ar pezh na c'hellomp ket gouzav : ar gwasherezh sevenadurel hag ar ouenne-loueriezh e-keñver yezh, o kenderc'hel e-barzh FR3 e-giz en amzerioù bravañ rouantelezh Giscard. Seurt budjetoù a zo ur gwir skoilh evit kement krouidigezh breizhek er skirwel."

N'eo ket tener ar C.G.T. gant renererezh FR3 : "Poent eo da FR3 pouez da vezañ ur c'hoariell evit teknokratet kreizennou, foudennou, ha leun a c'hoantegezh ma n'eo ket kollet o skiant vat ganto, n'o deus nemet dispriz evit ar rannvroioù hag a zis-soñj ar pep pouezusañ : da-zont uhelañ ar skirvelerezh rannvroel". Diskouez a ra ar CGT penaos eo chomet kreizennour an tele pa nac'h lezel ar rannvroioù da sevel o programoù o-unan, pa zalc'h kuzh (1) danevell Coutouly diwar-benn ar "yezhoù ha sevenadurioù rannvro" en tele.

Fellout a ra d'ar CGT e vefe doujet a-benn ar fin d'al lezenn, hag ur galy o deus graet d'an "Haute Autorite" (ar C'huzul Meur) evit-se.

Tangi Louarn.

(1) Deut omp a-benn da gaout skrid danevell Coutouly. Evit kaoz anezhañ skrivañ da Skol An Easav o reiñ 20 FF. (timbroù pe chekenn).

### KUZUL RANNVRO AR SELLED HA KLEVED

eloù zo bet e vefed o sevel Kuzul ar Selled ha Kleved evit rannvro Vreizh (4 departamant). Aon zo ne vefe kiniget da lakaat e-barzh den ebet en anv ar c'hevredigezhioù sevenadurel breizhek ha brezhoneg.

Skrivet eo bet eta gant SKOL AN EMSAV d'an Aotrou Komiser Rannvro ha da Guzul Meur ar Selled ha Kleved e Pariz evit ma vefe anvet tud a-berzh an aozadurioù brezhoneger hag o tifenn yezh ha sevenadur hor bro.

### BEP DAOU VIZ LENNIT

## AL LANV

KELAOUENN \*

SOKIALOUR

BREIZHEK

KOUMANANT BLOAZ : 50 lur  
SKOAZELL : adalek 100 lur.

da AL LANV 8 st. Enez Vaz  
29000 - KEMPER

Lennit al liamm

# AN EMBANN EN EUSKADI

**E**GIN (OBER) a lide warlene he fempvet bloavezh, zo bet krouet e 1977. Ar c'hwechvet kazetenn gwerzhet ar muiañ bemez e oa e 1981, gant 49.231 lenner, pa oa 92.940 gant an hini gentañ, "La Hoja del Lunes", eus Bilbo (Bilbao). EGIN, a vez graet en Hernani, un 20 kilometr eus Donostia (San Sebastian), eo an hini a embann ar muiañ a euskareg (10%). Tost eo da Herri Batasuna, strollad broadelour ha sokialour, harp politikel "ETA-militar".

ANO 7 - N° 102  
PRECIO 35 PESETAS / 7P  
Jesús Guibert, S.A.  
Calle de San Juan, 10  
48001 Leizor (Leizor - Vizcaya)  
Teléfono 40 20 10 00  
Fax 40 20 10 01

SABADO 8 DE ABRIL DE 1983

# DEIA

GURE LURRAREN DEIA

180 APRILAK 8 LAPURBATA

**Guibert: «NO PIENSO ABANDONAR EUSKADI»**

**LTH: Se rompió el bloqueo**

**Los más importantes del comando Madrid huyeron «entre las púas»**

**23-F: El fiscal rebatirá el lunes a los defensores**

**Euskara, ezezagin prestijiosua**

**Maifestación hoy en Bilbao, contra la escalada contrarrevolucionaria en Nicaragua**

**Se intensifican las batidas policíacas en amplias zonas de Madrid**

**Tensa situación política en Euskadi, según el Gobierno vasco**

Euskaregerien a lenn hag a skriv en euskareg e 1975

A LENN	%
hep poan.....	47,3
gant poan.....	52,6
na lennont seurt....	0,1
en holl.....	100,0

A SKRIV

A SKRIV	%
hep poan.....	26,0
gant poan.....	19,4
na skrivont morse...	54,6
en holl.....	100,0

Levrioù embannet en euskareg : (hep dek vloaz)

KOULZ	NIVER AL LEVRIOÙ
1937-46	37
1947-56	152
1957-66	301
1967-76	857

Levrioù embannet en euskareg : (bloavezhioù diwezhañ)

BLOAZ	LEVRIOÙ
1975	118
1976	95
1977	120
1978	169
1979	197
1980	209
1981	200

1/3 zo troidigezhioù  
2/3 zo en euskareg unvan.

A-hend-all e vez lennet pevar (4) levr euskarek ha selaouet pemp (5) pladenn euskarek diwar 100 gant bugale Euskadi.

# egin

Revista JORN PENA LUBERMAN

Fecha del número: 01 febrero / 1983

**Jesús Guibert liberado previo pago de un rescate a los CAA**

Aunque la familia dice no saber nada de este tema, los Autónomos lo reconocen implícitamente en su comunicado

**Marruecos prohíbe la pesca en la costa sahariana**

**23-F: El fiscal rebatirá el lunes a los defensores**

**Euskara, ezezagin prestijiosua**

**Maifestación hoy en Bilbao, contra la escalada contrarrevolucionaria en Nicaragua**

**Se intensifican las batidas policíacas en amplias zonas de Madrid**

**Tensa situación política en Euskadi, según el Gobierno vasco**

ORIN AR SKRIVAGNERIEN EUSKAREK (1977)

.BIZKAIA.....	22,5
.GIPUZKOA.....	61,0
.LAPURDI.....	13,5
.NAFARROA BEHEREA.....	03,0
.ZUBEROA.....	00,0
.NAFARROA.....	03,0
.ARABA.....	00,0

(Ipareuskadi) Hanternoz





# TRO AR BED

## SPAGN

"Las Linguas de Espana" (=yezhoù Spagn) a zo ul levr kaer, 444 fajenn ennañ, embanet gant... Ministrerezh Spagnat an Deskadurezh e Madrid. Goulennet en deus ar Ministrerezh digant ur bern arbenngourien skrivañ pennadoù diwar-benn o yezhoù. N'eo ket warc'hoazh e vo graet un dra heñvel gant Ministrerezh Gall an Deskadurezh...

Daniel Milmicher

(4) NA FIANNA EIREANN : emsav ar vroadelourien yaouank ; ur skol evit ar "volonteers", gouez da dud 'zo.

(5) IRISH INDEPENDANCE PARTY (I.I.P.) : strolladig kleizour ar 6 kontelezh.

(6) WORKER'S PARTY : gwechall ar Sinn-Fein "ofisial". A-enep implij ar feulster. Strolladig marksourien. E darempred gant U.D.B..

(7) OFFICIAL UNIONIST PARTY (O.U.P.) : a vod lodenn vrasañ al lealerien. Renet gant James Molyneux.

(8) ALLIANCE PARTY : strolladig o klask bodañ katoliked ha protestanted asamblez.

(9) DEMOCRATIC UNIONIST PARTY (D.U.P.) : strollad lealerien an tu dehou pellañ, renet gant ar Pastor Ian Paisley.

## BREIZH

## IWERZHON

1916-1983 : un niverenn ispisial "an Phoblacht" da geñver gouelioù Pask ha deizha-bloaz emsavadeg 1916.

Fellout a ra d'ar Republikanek reiñ da soñj emañ o stourm o kenderc'hel abaoe kantvedoù. Ne echuo nemet pa zistroo an holl soudarded saoz en o bro. Skarhet int bet eus ar 26 kontelezh da heul emsavadeg 1916 hag ar stourm a zo renet hiziv a zo heñvel houzh hini ar bloavezhioù-hont. Ar brezel ne c'hell ket paouez, eme an I.R.A.. Ar re varv a zo ur skouer hag un abeg evit kenderc'hel. Penaos soñjal en un ehan-brezel ? An holl boanioù n'o defe servijet da netra ? Ar stourm a vo echu an deiz ma ne chomo soudard saoz ebet ken war zouar Bro-Iwerzhon.

Pajennoù kreiz ar gelaouenn a zo gouestlet da "roll-enor" stourmerien an I.R.A. ha "Na Fianna Eireann" (4) marv e-kerz prantad-mañ ar brezel, da larout eo abaoe penn diwezhañ 1969. 229 a zo anezho betek-hen. Penaos ankouaat, ha penaos paouez da stourm ?

Nevezintioù gant Raymond Gilmour, ar flatrer. Pellgomzet en deus da dud e diegezh, d'e vamm-gaer ha d'e c'hoarezed, evit larout dezho en doa keuz bras, hag e oa e sell da eilpenañ ar pezh en doa anzavet d'an R.U.C..

An deiz war-lerc'h en deus pellgomzet d'unan all eus e c'hoarezed met ne oa ket ken asur e gomzoù ken. Martin McGuinness, kannad ar Sinn-Fein e Derry, a zo deuet a-benn da gaozeal gantañ er pellgomz ivez. Krediñ a ra heñvel eo bet adaptet Gilmour gant an R.U.C. ha ne c'hell ket ken pellgomz evel ma karfe.

Reiñ a ra ar Sinn-Fein ur pouez bras d'an afer-mañ. Arabat ankouaat ez eus 71 a dud eus Derry tamallet abalamour da Gilmour.

An emvod diwar-benn "Bro-Iwerzhon a-bezh" he deus poan da vezañ aozet. Ul lodenn vat eus ar c'hostezennoù politikel pedet o deus nac'het ar gouvidenn ar sizhun mañ. Nann, a respont asambles an Irish Independence party (5), ar Worker's Party (6), an Official Unionist Party (7), an Alliance Party (8) ha soken an Democratic Unionist Party (9) renet gant Ian Paisley ! Poan a vo da dennañ un dra bennak eus ur "forum" na gemero perzh ennañ nemet ar strolladoù a zo ar pellañ eus ar stourm penderiek.

Adkavet hon eus prezidant ar Sinn-Fein : Ruairi O'Bradaigh. 20 linenn verr a zo gouestlet d'ar veaj emañ oc'h ober e Bro-Canada en anv ar Strollad. E kelt-se ez eus

ur bajenn a-bezh gouestlet da gannad yaouank kontelezh Armagh : Jim McAllister. Anat eo o deus roet an dilennadegoù ul lañs nevez d'ar Sinn-Fein, a oa techet da chom moredet abaoe un toullad bloavezhioù.

NE GLOT KET MAT GANT AL LEC'H...

BEN NANN, MET UN AFER E OA : 10 £ SAOZ AN DEK PANELL PRENET HON EUS DIGANT AR C'HEMBREIZ !



## SKOS

E Gouel ar Filmoù Keltiek e Glasgow ar bloaz-mañ eo aet ar priz kentañ d'ur film eus Breizh. Anavezet eo ar Gouelez a zo ur c'houkour digor d'an holl filmoù savet en unan eus ar yezhoù keltiek. Ar film breizhat " a zo bet komprenet e yezh gant an holl varnerien avat... ur film mut e oa !

Tri gouezeleger yaouank, eus an Nicolson Institute, a vo oc'h ober Tro Vreizh eus an 13 d'an 19 a viz Even. Ar veaj-se eo ar priz o deus gouezet Anne M. Morrison, Johanne M. Morrison ha Mairi Mac Lennan evit bezañ skrivet e gouezeleg bep a studiaden diwar-benn ar vuhez er broioù keltiek. Gant o c'helenner e veajont.

Aozet eo bet ar veaj gant An Comann Gaidhealach, gant sikour-arc'hant Burev Skosat Komision ar C'hommuniezhioù Europat. Goude Roazhon, e weladenn Breizh Izel, ha mont a raint e darempred gant kevredigezhioù sevenadurel brezhonek. Spi zo gante da welout Bretoned yaouank o vont d'o gwelout goude. Spi ganimp e vefe gant an hevelep skoazell-arc'hant.

da Vro-Euskadi, e ti Mariannig CROIZIER-SALOMON-an ti gwen-29110 KONK-KERNE.

## KURDISTAN

E dibenn miz Mae eo aet tre arme Turkia en Irak. Da vrezeliñ a-enep enebourien C'homeini ? Nann avat ! Da sikour Irakiz a-enep d'ar Gurded fallakr ha disuj, en Irak kenkouez hag en Turkia. Met sioulouc'h n'int ket en Iran. A-benn pegoulz eta englev an imam hag e enebour touet Saddam Hussein, a-gevret gant faskourien Ankara, "da ziskoul-mañ da vat ha da viken" kudenn ar Gurded ?

Pennabeg ar meni aloubadeg-se a zo dreist-holl, moarvat, ar sikour roet gant Kurded Irak d'an ASALA (Arme Kuzh Armenian). Fentus, ma c'haller larout, pa soñjer eo dreist-holl Kurded a lazhadegs Armeniz e 1912 evit kont ar gouarnamant turk.

## KEBEK

Kebekiz zo, hag int gallegerien, n'int ket gallgar evit ur blank. Met ur Gall a blij dezhe dreist ar re all : an hini kentañ, ar Prezidant, Fañch Mitt.

En o gazetenn "Croc" e skrivont : "Ar bravañ tra graet gant Mitterrand oa difenn ouz ar C'hallaoued da zispign muioc'h eget 2000 lur en estrenvro... Se zo kaoz re veloc'h mui Gallaoued dre ar bed o klemm en abeg d'ar boued, d'ar gwir, d'an dezougenn, d'ar privezhioù, d'ar yezh, d'ar wrez, o klemm hep mui ken, petra ! Ar peoc'h ! Ar peoc'h santel !".

Ma kinnigont skrivañ da gannad gall Ottawa evit goulenne e ve roet Priz Nobel ar Peoc'h d'ar Prezidant Gall evit ar servij bras-se rentet gantañ d'ar Bed a-bezh. D'ar Bed, marteze. D'ar Vretoned avat...

## KEMBRE

Klaskit ijinañ Giscard d'Estaing, Barre, Marchais, Chirac, Chevènement o reiñ arc'hant da skolioù Diwan... Un huñvre eveljust. Met e Bro-Gembre n'eus ket pell eo bet gwelset Edward Heath, bet kentañ Ministr-Mirour, Michael Foot rener ar Strollad Labour ha David Steel, rener ar strollad Liberal, ha re all c'hoazh oc'h ober profoù d'ar strollad kembraek evit ar re yaouank, Urdd Gobaith Cymru, d'e skoazellañ.

Ha teurel a raio evezh Mitterrand... ? Resevet en deus lizhiri o c'houleñn krouiñ ur c'hcAPES brezhoneg, sinet gant ur bern tud o labourat e Levraoueg Vroadel Vro-Gembre en Aberystwyth hag e Skol-Veur Aberystwyth. Da heul gweladenn Per Denez da Gembre e miz Meurzh o deus int divizet ober kement-se da skoazellañ stourm ar Vretoned.

Emañ Kuzul Kontelezh Gwynedd o klask gwerzhañ 700 panell hent divyezhek, deut da vezañ didalvoud abalamour d'e bolitikerzh divyezhegezh.

E Kembre e vo graet ar 5-vet Gouel ar Film Etrekeltiek e 1984. Evit-se e klasker un aozer-gouel evit labourat ur bloavezh-pad, hag a ouife Kembraeg. Paet E 10 000. Ha graet e vo heñvel e Breizh e 1989.

Kembreiz a c'hell bremañ deskiñ brezhoneg dre ar C'hem-braeg gant SKOL OBER.

## EUSKADI

Xabier SANCHEZ ERAUSKIN, bet rener ar gasetenn sizhunik "Punto Y Hora de Euskal Herria", so en toull-bac'h Naclares de la Oca (Alaba) abaoe ar 15 a viz Ebril. Da 18 miz eo bet kondaonet gant lez varn an Audiencia Nacional e Madrid evit bezañ "difennet ar muntrevezh" ha "kunujennet ar Roue", da heul ur pennad-kaoz gant c'hoarezed daou republikan politikel, Goikoetxea ha Apaolaza, hag ur pennad all o kentañ gweladenn Juan Carlos Iañ e Gernika e 1980.

Evit goulenne ma vo dieubet e c'haller mont e darempred gant ar C'huzul-Skoazell

**ISTOR BREIZH**

NAONED 1572

Ur skouer kaer tre haeldid vreizhat hag a stourm ouz urzhioù fallakr a-bezh ar Galloud kreiz.

Maer Naoned Guillaume d'Harrouys aotrou ar Seilleraye, hag e advarnion, a nac'h sevenañ an urzhioù lazhadeg kaset gant Paris. E Naoned (encl a-tand-all e Breizh a-bezh, douzet da urzhioù arona gouarnour an amzer-se, an dug Bourbon-Montpensier) ne vo ket a-tre Sant Barteleme. Harrouys, katolik mat ha muioc'h c'hoach kristen mat, a vo karc'harant hag ur c'hevredet touet. Mercour, lakat en e lec'h, Hemañ, e 1585 a redio an diavoutidi da zantav o c'hredennou pe da guitat o Bro.

**histoire de Bretagne**

NANTES 1572

Un magnifique exemple de tolérance bretonne et de résistance à un ordre inique du Pouvoir central.

Le maire de Nantes, Guillaume d'Harrouys, sieur de la Seilleraye, et ses assesseurs, refusent d'exécuter les ordres de massacre envoyés de Paris. A Nantes (pas plus d'ailleurs que dans toute la Bretagne, malgré les ordres impératifs du gouverneur de l'époque, le duc de Bourbon-Montpensier), le Saint-Barthélemy n'aura pas lieu. Harrouys, bon catholique et plus encore bon chrétien, sera emprisonné et remplacé par un fervent ligueur. Mercour, lui, en 1585, exigera de ses administrés réformés l'abandon de l'Édit.

ar gartenn-mañ a vez gwerzhet gant Skingomz ha Skinwel  
9, bis st. sant V. a Saol-Sant Brieg-(15), an 10 franko

BREMAN NIVERENN 21

MIZ EVEN 1983

TAOLENN

LIZHIRI DA VREMAN.....	2
HAG A NEVEZ E BREIZH ?.....	2
BREMAN TRI BLOAZ.....	2
BREMAN	
20 NIVERENN BREMAN.....	3
FOROM	
EMGLEV SEVENADUREL.....	4
AR PESKED HAG AL LABOUSED..	4
E BREIZH	
GOUEL AR BREZHONEG.....	5
DIZOLOIN BRO ROSTREN.....	5
PEBEZH ABADENN.....	5
LABOUR	
UR SINDIKAD WAR HENT AN DI- VROADELAAT.....	6
MEDIA	
AR BREZHONEG E RADIOU BIHAN	7
FR3.....	7
EUSKADI	
AN EMBANN EN EUSKADI.....	8
TRO AR BED.....	9
BERR HA BERR	
TAOLENN.....	10
KEMENNADENNOU.....	10
BREMAN-8, st.HOCHE-35000 ROAZON	
Koumanant evit 12 niverenn :	
96 L. - SKOAZELL : ouzhpenn....	
MAKETTENN SAVET GANI : Joel Don- nart, Lena Louarn, Silvi Don- nart, Jil Killever.	
PENNAOÙ SAVET GANI : Herve ar Beg, Tangi Louarn, Mark Kerrain, Yann-Ber Deïsisle, Jorj Gwegen, Strollad Plougin, Daniel Mil- wicher.	
TRESADENNOU GANT: Malo Louarn.	
LUC'HSKEUDENNOU : Lena Louarn, EGIN, Strollad Plougin.	

MOULET E:Ti Moulerezh al Lisoù  
13, straed ar Moneiz- ROAZON

An pennadù sinet ne engoues-  
tlanit nemet ar re o deus savet  
anezho.

C.C.P.A.P. 62974

Kasetenn di-kleriet hervez le-  
zenn, ha tennet 800 skouerenn  
anezhi. ISSN:0246 - 5264



**°KOUMANANT°**  
**BLOAZ**  
**12 Nenn**  
**96 lur**

**E**n OALED DIWAN,  
29214 TREGLOU, (98)04-  
05.42, e vo stajoù e-  
kerz an hañv. E miz  
Gouere, eus ar 4 d'an  
13, stummadur evit dan-  
vez-skolaerien Diwan ;  
eus an 18 d'an 28, brezh-  
honeg ha kembraeg evit  
Bretoned ha kembreiz o  
teskiñ ar yezh all. E  
miz Eost, eus ar 1af d'  
an 13, bag-dre-lien e  
brezhoneg ; eus ar 15 d'  
an 20 hag eus an 22 d'ar  
27, vakañsoù-familh e  
brezhoneg. Hag eus an 29  
a viz Gouere d'an 3 a  
viz Gwengolo, staj war  
ar maez ha studi "yezh  
leour".

**CRASH-COURSE E**

**PLOUGOUKANT**

Unan a vo dalc'het  
e-kerz miz Gouere, adal  
al Lun 11 da 9 eur beure  
betek ar Sadorn 16 da  
greisteiz. Unan all a vo  
e miz Eost adal al Lun  
22 betek ar Sadorn 27.

An daou rummad ken-  
teliou-se a zo evit tud  
o devo bet studiet brezh-  
honeg e-pad ur bloa-  
vezh, er c'henteliou-noz  
pe er skolioù. D'ar ge-  
lennerien, eta da gemenn  
an deiziadoù-se dezho.

Ne vo nemet ugent  
plas, sed eo ret difren-  
tañ ; klozet e vo an  
enskrivadurioù 3 sizhun  
a-raok deroù ar staj.

Da gaout titouroù  
spisoc'h, skrivit d'ar  
chomlec'h-mañ : JP Buf-  
fard, "Crash Course de  
breton", 1 place du Cen-  
tre, 22200 GWENGAMP.

**KOUVIADENN**



**YANN SOHIER**

Stourmer evit ar brezoneg er skol  
(1901-1935)

Louarn eo an Doktor J. J. KLEAC'H  
mijer Montpoules hag Yvonne KODI  
presidantes AR PALZ o kouviad  
ahanoc'h da gemer pezh e digradur  
an dekouadeg gouestlet da Yann  
SOHIER AR PALZ HA BREIZH ER  
BLOAVEZHIOU 30, da ar menezher 15  
a vis even 1983, da 18, e Mirdi  
Montpoules.

**D**alc'het e vo ar 15-  
ved Kendalc'h-studi brezh-  
honeg savet gant ar  
Falz/Skol Vreizh eus ar  
sul 28 a viz Eost (6 e.  
noz) betek ar sadorn 3  
a viz Gwengolo 1983 (2  
eur endervezh), en ti -  
vakañsoù-tiegezh "Manoir  
de la Briandais"-MISSIL-  
LAC- 44160-PONT-CHATEAU-  
Pellgomz:(40)88.32.66.



**S**avet ez eus bet gant  
an A.S.O.B. (Association  
de Solidarité Occitanie-  
Bretagne) ur greizenn  
gelaouiñ anvet gante :  
"Centre de Documentation  
Occitane" - 30, kae saint  
Cyr- 35100 Roazon- Dig-  
gor e vez d'ar Meurzh  
goude kreisteiz eus 6 e.  
da 7 eur. Kavet e vo eno  
levrioù, kazetennoù ha  
chomlec'hioù o tennañ da  
vuhez ekonomikel ha po-  
litikel Okitania.

**C**hom a ra kalz skou-  
errennoù eus al levrig :  
"Europa/Kartennaoueg po-  
litikel" embannet gant  
an Amzer. Ar priz : un  
timbr 2,30 Lur evit 1  
skouerenn, 2,90 Lur evit  
2 skouerenn. Skrivañ da :  
"An Amzer" 2 straed ar  
Richardière- Roazon.

**K**EIT VIMP BEO (Oaled  
ar Re Yaouank, 29212  
Brieg) zo o vont da em-  
bann 3 levr bannoù-  
treset nevez eus ar  
rummad Jonathan. 26 lur  
an tamm, ar rakpreñañ a-  
raok an 30 a viz Even.

**G**ant OBER ez eus bet  
embannet ul levr ISTAR  
BREIZH, an hini kentañ  
e brezhoneg abaoe 100  
vloaz. OBER, Gwaremm  
Leurvaen, Plufur, 22310  
PLISTIN.

**K**ELC'H MAKSEN WLEDIG  
eo anv ar gevredigezh  
nevez savet "e koun an  
hini a voe da orin savi-  
digezh Vreizh" e 383, pa  
zilestras war gevandir  
Europa. "Pal ar c'helc'h  
zo luskañ ar sevenadur  
keltiek diwar ober gant  
ar brezhoneg peurunvan  
evel benveg-krouiñ en ur  
c'hannadig diabarzh...  
gant implij ar galleg  
evel benveg-kelaouiñ...  
er gelaouenn DIASPAD...  
Digor eo ar c'helc'h d'  
ar re zo mennet da ves-  
troniañ ar brezhoneg e  
sell da sevel testennoù  
lennegel, skiantel pe  
istorel... Evit bezañ  
degemeret er c'helc'h-  
labour-se, kelc'h seve-  
nadurel rik, a-us da bep  
kostezenn bolitikel,  
skrivañ da Yann-Ber TIL-  
LENON, 15 rue de la Gai-  
té, 75014 PARIS."

**E** Sant Brieg, eus an  
2 d'an 10 a viz Gouere  
1983, e vo ur "Festival  
de Musique Bretonne, ha  
Danseries en Penthièvre"

**E** Roazon, eus an 2  
d'an 10 a viz Gouere 83,  
e vo ar "Festival des  
Tombées de la Nuit".

**E**n Oriant, eus ar 5  
d'ar 15 a viz Eost 1983,  
e vo ar "Festival Inter-  
celtique de Lorient".

*Eveljust, en hini ebet eus  
ar gouelioù-se ne vo an dis-  
tenañ divyezhegezh, evel ma  
tiskouez anat o anvioù.*



2 - 10 a viz GOUERE 83

FESTIVAL KROUERIEN  
HAG ARZOURIEN VREIZH

Soneriezh, dañs, kan, c'hoariva,  
diskouezadegoù...

**KINNIG LABOUR**

Ar gevredigezh **CHADENN** zo o klask  
un emsaver barrek d'ober war-dro aferioù  
kenwerzhel a-bep seurt ha bruderezh. (Di-  
plomoù n'int ket ret. Intrudu a zo e-  
zhomm).

Da gregiñ e vo ul labour hanter-am-  
zer. Pellgomz e Roazon :

(99)54.44.34.  
(99)79.54.90.

**GOUEL  
AN DAOL GRENN**

Kevredigezh sevenadurel - Plouizi-22200-

**D'ar sadorn 9** a viz Gouere (9e 30 noz):  
Youenn GWERNIG hag e sonerien : Gildas  
Beauvoir, Christian Desbordes, Per Talek.  
**FEST NOZ gant** : Belvels-Michel, Puillan-  
dre-Kemper, Jaguin-Chapelain h.a. ... e  
sal ar gouelioù.

**D'ar sul 10** a viz Gouere (3e. g.m.):  
KERMES gant standoù liesseurt(gant Diwan  
Gwengamp), standoù sevenadurel.  
KONKOUR BOULLOU  
Diskouezadeg gouren(Gourenerien Blouizi)  
C'hoarioù breizhek(gant Atletik Klub D.)  
Diapioù Fanch P."ar c'hoarioù breizhek"  
Leurenñ zigor d'ar sonerien ha d'ar ga-  
nerien vrezhonek.  
Teatr brezhonek gant Strollad Bugale St  
Nigouden.

Da 5 eur 30 : FEST DEIZ gant ar strollad  
"BRETON IRISH BAND"  
Da 9 eur 30 : FEST NOZ gant KANFARDED  
ROSTREN, Breudeur Morvan...lodenn gentañ  
ar c'haner YANNIG ar BLEIZ hag e sonerien.  
Kafe, krampouezh...gant Klub ar re gozh.

c'hoariva brezhoneg gant :

Strollad Ar Vro Bagan  
Yaou 8 a viz Gouere 83



**J**ob PHILIPPE, telen-  
nour, o chom e Naoned,  
90 straed Paul Bellamy,  
a gemenn eo prest da son  
evit kevredigezhioù a  
bep seurt (1.000 lur a  
c'houlenn evit un aba-  
denn 1 eur 30).

**F**EST NOZ e St Kongar  
(tostig da Vaen) d'ar  
Sadorn 25 a viz Even,  
derc'hent Devezh ar Vro.

**D**EVEZH AR VRO e Bal-  
lon (Baen-Redon) d'ar  
Sul 26 a viz Even.

**G**ouel Pobl Vreizh e  
Park Penfeld e Brest  
d'an 8 ha 9 a viz Here,  
gant I Muvrini marteze.

**G**ouel Emgann 12 ha 13  
a viz Du 83, e Park Ker-  
gozh e Gwengamp, gant I  
Muvrini, sur.